



K
R
O
A

B
R
E
I
Z

GWENGOLO 1948

5

PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Da Zoue dre an oferen (Y.-F. Falch'un).....	Pajenn	1
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	2
Psalmou ar Binijen (F. Guivarc'h)	—	3
Sant Loeiz-Vari a Vontfort (Y. Tranvouez)	—	4
An durzunell (Evnig Penn-ar-C'hoad).....	—	5
Gouel ar Bleun-Brug (Y.-F. ar Falch'un).....	—	7
Kantikou ha Kantikerien Breiz-Izel (Loeiz Lok).....	—	11
Levriou.....	—	12
Lennit (Y.-F. ar F.)	—	13
C'hoarzomp c'hoaz.....	—	15
Keleier.....	—	16

Ar wezenn dero : Yan Gorrigan.

War golo an niverenn-man : eun straed goz (skeudenn Gilles Boinet).

PRIZIOU :

An niverenn-man	25 lur	} Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.
Koumanant ordinal	200 lur	
Koumanant a zikour	300 lur	
Koumanant a enor	500 lur	

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)
Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

Micherourien, tiez a genwerz!

grit brud d'ho staliou e Kroaz-Breiz!

AU MEUBLIER D'ART

Ep-Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains



**CAMIONNAGE
DÉMÉNAGEMENTS**

GARDE-MEUBLES

L. Tanguy
Quimper

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE

GAZO-BOIS

ACHATS - VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC

Siège Central : 34, Place des Lices, RENNES

Téléphone 55-75

TI ar GLOAN

9, Straed ar C'higereziou, KEMPER

*Gloanañ digemmesk
eus an oll ardameziou*

E ti **SOUFREREZ KERNE**
E. BEGOT

13, Straed Jean-Jaurès, KEMPER
Téléph. 9-33

E vez dreset adteuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou
Gwerz a c'holioù a hep ment — labour vat, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"



MODÈLES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ
ORFÈVREURIE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplômé
de l'Ecole
Nationale
d'Optique

DELBENN

Diplômé
de l'Ecole
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN

7, Rue Kergariou
QUIMPER


VITRAUX

PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN

Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133626



Da Zoue dre an oferenn

NEUS nemet dre Hor Zalver Jezuz-Krist hag e c'hellfemp mont betek Doue hon Tad, evit kement tra hon eus da ober gantañ : « Den, eme Jezuz e-unan, ne'z a d'an Tad nemet me a gasfe anezañ. »

Hag e pelec'h e kaviomp Hor Zalver evit ober hent gantañ ?

Araok pep tra, en OFERENN.

Er parrezioù digristen, e klevet awec'hou an dud o klemm : « Perak mont d'an oferenn bep sul evel ma c'houlenn ar veleien ? Daoust ha gwelloc'h e vezimp p'hor bezo tremenet eun hanter-c'ur en iliz, o sellet ouz ar beleg en e zav e kichen an aoter, e gein troet deomp ? Me a lavar va fedennou mintin ha noz, ne lazant na ne laerant den : daoust ha n'eo ket awalc'h evit servicha Doue ? »

Nann ! N'eo ket awalc'h !

N'eo ket ar pep kenta zoken !

« Klevout a ri mat penn-da-benn

Sul ha gouel-berz an oferenn. »

56 gwech bep bloaz en deus urz ar c'hristen gwirion da zont d'an iliz d'en em unani gant Jezuz en oferenn.

Hep koves bep sul, e c'heller beza eur c'hristen mat, gant ma chomo an ene digailhar diouz ar pec'hed marvel :

« Eur wech ar bloaz da vihana

E kovesai hep nac'h netra. »

Hep komunia bep sul, e c'heller ive beza eur c'hristen beo, daoust m'eo diaes chom krefiv pell amzer ma ne zebret ket ar Bara a vuhez :

« Ha da Zalver a resevi

Da Bask devota ma c'helli. »

Hep lavaret ar pedennou mintin ha noz, e c'heller c'hoaz beza eur gwir vab da Zoue, daoust m'eo dereat lavaret dezañ alies ar garantez !

Met ma ne deuet ket d'an oferenn bep sul, ne c'heller beza nemet eur c'hristen maro, pa ne vez netra a vras da vihana o viret da zont d'an oferenn : dont a reer neuze da veza dirak Doue eur mab a gounnar !

Perak al lezenn striz-se e keñver an oferenn bep sul ?

Abalamour ma ne c'hell ar c'hristen beza salvet ha santelaet nemet dre Groaz Hor Zalver.

Ha ma n'eo an oferenn nemet Kroaz ar C'hrist savet a nevez war ar C'halver evit enor Doue ha silvidigez ar bed.

War ar Groaz, Jezuz a ginnigas e varo d'e Dad, gant doujañs ha senti-digez evit an dud, pec'herien ha dizent ; ha dre-ze, Doue a roas adarre d'an den perz en e vuhez hag en e garantez.

En oferenn, daoust ma ne varv mui, Jezuz a ginnig a nevez d'e Dad e varo santel, skeudennet dre an disparti etre spesou ar bara hag ar gwin, a verk an disparti a voe graet war ar C'halvar etre korf ha gwad Jezuz.

Ac'hano e teu talvoudegez dispar an oferenn evit ar c'hristen : dreizi e ro da Zoue, a-unan gant Jezuz, an enor en deus gwir da gaout, dreizi e tired ennañ karantez Jezuz evit e Dad...

Ha petra eo beza kristen, nemet karet Doue gant Jezuz, ha dre Jezuz !

Y.-F. AR FALC'HUN.



Goueliou ar Miz



1 A VIZ GWENGOLO : SANT JILI. — Ar Zant-mañ a zo enoret e meur a barrez eus Breiz. — Eun devez e tiwallas eur C'havrez ouz eur vandennad chaseourien : unan eus ar re-mañ a dennas warni evelato, hag ar bir a dreuzas dorn ar Zant. — Setu aze eur skouer eus ar skoazell a ro hepred an Iliz d'an dud dister ha dinoaz, enep ar re c'halloudus o devefe c'hoant da wallgas anezo.

8 GWENGOLO : GINIVELEZ AR WER-C'HEZ, HA PARDON AR FOLLGOAD : " Kanomp ganedigez ar Werc'hez Vari. " O welet ar Werc'hez o tont er bed-mañ, sonjomp ervat n'emân mui pell ar Zalver a dle diskar rouantelez Satan, ha renta deomp hor frankiz. — Evel Salaun ar Foll, saludomp gant levezenez an hini a dle beza mamm Jezuz, ha mamm pep hini ac'hanomp : " Ave Maria! " — Pedomp anezi da zont d'hor sikour e kreiz hon trubuilhou :

Harpit an Iliz santel
Avel diroll a ra...
Tenn ha kriz eo ar brezel,
Ar peoc'h, o Maria!

Da geñver eun deiz ker kaer ha ken laouen, ne dlefe kristen ebet chom hep tostaat ouz ar zakramanchou.

12 GWENGOLO : 17ET SUL GOUDE AR PANTEKOST. — " Mestr, pekini eo brasa gourc'hemenn al Lezenn? " — Kriste-nien, ha soñj mat hon eus penaos e respontas Jezuz? " O'houi a'garo ho Toue gant hoc'h

holl galon, hoc'h holl ene, hoc'h holl spered : hennez eo ar c'henta hag ar brasa gourc'hemenn. — An eil a zo heñvel outañ : c'houi a'garo ho nesa evelloc'h-hoc'h-unan. " — Karet Doue dreist pep tra, karet an nesa eveldomp hon-unan, setu ar pez a c'houlenn Jezuz digant pep hini ac'hanomp. Betek-hen, ha sentet hon eus outañ?

15, 17 HA 18 GWENGOLO : PEVARE AMZER. — Bremañ, n'eus na yun na vijil; abalamour da-ze, bezomp aketusoc'h eget biskoaz da stourm ouz hon techou fall, da veva er stad a c'hras, ha da ginnig da Zoue hol labourou tenn hag hor poanioù. — Niverus eo siouaz, an dud a bec'h : niverusoc'h e tlefe beza c'hoaz an dud a ra pinijenn.

D'ar 15, emañ gouel Itron-Varia ar Seiz glac'har, ha d'ar 17, gouel Gouliou sant Frañsez a Asiz. — Ar Werc'hez he deus gouzañvet, sant Frañsez hag an holl Zent o deus graet kement all... Ha ni a zofij deotip e c'hellfenn mont d'ar baradoz hep ober pinijenn! Pebeuz fazi!

19 GWENGOLO : 18ET SUL GOUDE AR PANTEKOST. — " Bez leun a fisanz : pardonet eo dit da bec'hejou! " Lennomp gant evez an avel en hol levr-ofereñn hag e komprenimp piou eo Jezuz : Mab Doue en em c'hraet den... Pegen bras eo e c'halloud hag e vadelez e keñver ar bec'herien p'o devez keuz gwirion d'o fec'hejou. — Ha pegent diskiant omp bet, pa 'z omp chomet devezioù, sizunvezioù, mizioù ha marteze bloavezioù er stad a bec'hed, o koll hon amzer hag e riskl d'en em zaoni. E broioù ar misioù e vez kavet tud d'ober dek, ugent kilometr hag ouzpenn, evit mont da gaout eur beleg da goves dezaf o fec'hejou... hag e Breiz, e-lec'h ma 'z eus beleien e pep parrez, e chom eur bern kristenien, n'ouz pageit, da vreina er stad a bec'hed! Pebeuz dallentez ha pebeuz follentez!

26 GWENGOLO : 19ET SUL GOUDE AR PANTEKOST. — " Ar Roue a gasas e zervijerien da bedi an dud da eured e Vab, met ne fellas ket dezo dont. " — An Iliz, e ano Hor Zalver, a bed ar gristenien da zont d'an ofereñn hag ouz an Daol-zantel, met allas, nag a bed a gav ivez digarezioù evit chom hep dont : " Me 'zo re bell! Me n'am eus ket amzer! Me n'oun ket din! " — Digarezioù ha netra ken!

29 GWENGOLO : SANT MIKAEL ARC'HAEL, an hini a drac'has war Lusifer. — En eur echui e ofereñn, ar beleg a c'houlenn skoazell digant ar Zant brasmañ. A-unan gantañ, pedomp ivez Sant Mikael d'hon difenn ouz Satan ha da deurel ebarz an Ifern an holl Aelez fall a zo o redek dre ar bed o klask koll an eneoù. Sant Mikael, pedit evidomp...

AN TAD.

PSALMOU ar BINIJENN

Selaout va fedenn, Doue, ha d'am mouez Na jomit ket bouzar. Diwarnoun, em enkreiz, Na droit ket ho penn : ho skouarn, digorit; Hirio, p'hoc'h aspedan, buan va venit. Niver va devezlou o teuzi, mie a wel E doare ar voged a nij gant an avel. Va eskern a zo krog enno eun tan spontus, Ker gwas ha pa vijent o leski war glaoù ruz. Skoet eo va c'halon, dizec'het eo a-grenn, Evel er prañeler hoc'h eus gwelet ar foenn. Ankounac'haat a ran debri va zamm bara, Ha kement e klemman ma ne jom mui netra Da c'helel va eskern, nemet kroc'hen dizec'h. Evel ar pelikan, e klaskan ar gouelec'h; 'Vel ar gaouenn, labous an dismantrou, Hep gwelet den, e karan tremen va devezlou. Ne gouskan tamm, ha chom a ran va unan-penn,

Heñvel ouz an evnig puchet war an doenn. Dale'hmata e krouez warnoun dismagañ, rebechou; Enebourlen touet am c'harg a valloziou. Lodu, e-lec'h bara, a ya ganen da bred, Ha kement a evan 'zo raktal kemmesket Gant eur mor a zaelou : rak c'houi, en ho kounnar Hoc'h eus va dibradet ha strinket d'an douar. Va devezlou a dec'h, ker buan hag ar skued : Evel ar yeot en haf, dizec'het oun ha treut. Met c'houi, Doue, a jom ar mestr da virvien; A-rumm da-rumm oc'h kanmeulet gant mab-den. C'houi a zavo : diskouez a reoc'h ho trugarez Evit Slon, rak deuet eo e gwirionez Ar mare d'hen ober : hoc'h holl zervicherien A gar, en o c'hêr-benn, ar veln hag ar boultrenn. Ar broadou a-bez, da Zoue a zoujo, Holl rouaned ar bed dirazañ a zoublo

P'en dezo adsavet kêr-veur Jerusalem, P'en do dizoloet splannder skedus e zremm, Ha p'en do selaouet mouez ar sklavourien O c'houlenn digantan diframma o chedenn. Kement-se 'vo skrivet, hag ar gwiskadou tud A zo c'hoaz da c'henel, holl a skigno ar brud Eus madelez Doue, mar plij eun defz gantañ Diwar ar c'hrec'h santel m'eo azezet warnan, Tref e benn da deurel war an douar eur zell, Selaou ar sklavour kêz o c'houlenn e skoazell, Terri o ereou, evit m'o do frankiz, D'an dud n'hellont gedal nemet eur maro kriz. Slon neuze 'glevo kana gloar d'e ano, Ha, gant e vleudil, ar gêr a dregerno. Rak dont a ray enni ar rouanteleziou, Evit meuli Doue, da gemmesk o mouezlou. P'edon e-kreiz an hent, va nerz hoc'h eus torret; Niver va devezlou a zo ganeoc'h krennet.

Ha lavaret a ran : " va Doue, da vihana, N'am sammit ket dioustu : emaoñ c'hoaz em gwella. " C'houi 'bad, hag a bado, eus eur c'hantved d'eun all; An douar-mañ hoc'h eus diazezet gwechall. Hag ho tourn en deus graet holz skedus an nefivou. Met an nefiv, an douar, 'zo berr o devezlou! C'houi ne dremenit ket; an holl draou all avat A ya primm a dammoù, evel ar c'hoz dilhad : Ken aes ha ma chenchomp gwiskamant war hon tro, E c'hellit, pa garit, cheñch o doare dezo. Met c'houi, goude kosaat, ne deu tamm kemm ennoc'h; Dreist an holl gantvejou, da viken, e padoc'h. Gouenn ho zervicherien, da jom, a zistrolo 'Barz ar rouantelez hoc'h eus miret dezo. Hag enni, startaet gant ho pre'h galloudus, Dirak ho taolagad, holl e vevint eurus.

F. GUIVARCH.

Sant Loeiz-Vari a Vontfort

— KENDALC'H —

YAOUANKIZ EUR ZANT.

Adalek e genta yaouankiz, Loeiz-Vari a Vontfort a voe ive misioner ar Werc'hez Vari.

Ma oa ken troet da lakaat ar re all da lavaret ar japeled eo abalamour m'hel lavare e-unan ken lies ha bemdez : en em denna a rae a-douez e vignoned evit mont da bedi en eul lec'h distro bennak eus al liorz.

Pa zeu da Roazon e kendalc'h gant an hevelep henti, nemet e tarempredo bremañ ilizou ha chapelion gant skeudennou brudet ar Werc'hez : eno eo e glask pa ne vez ket er skol pe o studia e-unan-penn.

An eontr a roas degemer dezañ a oa beleg-sakrist Sant Salver, an iliz a zalc'h skeudenn Itron-Varia ar Burzudou, ken karet e kêr Roazon savetaet ganti p'edo war-nes koueza etre daouarn he cnebourien. Bemdez, en eur vont d'ar skolaj hag o tont en dro, Loeiz-Vari a ra eno eun ehan, hag e chom stouet epad hir amzer, o pedi, oc'h en em ginnig da Vari, o c'houlenn diganti taoler evez warnañ, e ziwall dreist-holl diouz ar pec'hed ha diouz enebourien e ene, evel m'he doa gwechall difennet kêr.

Mont a ra ive d'an ilizou all, hag o c'haret a ra muioc'h pa c'hell daoulina enno dirak eur skeudenn eus ar Werc'hez. Na pet gwech eo bet kavet e ilizou Itron-Varia ar Peoc'h hag Itron-Varia ar C'helou mat.

Trawalc'h oa neuze e welet evit gouzout pegen birvidik oa e garantez e keñver Mari. Seblantout a rae koll anaouedegez eus traou an douar ; chom a rae difiñv war bennou e zaoulin epad euriou a-bez, e zaoulagad entanet o para war skeudenn an Itron-Varia.

« An holl a oar ervat, a skrive e geneil, an Aotrou Blain, ne anve Mari nemet e Vamm, e Vamm vat, e Vamm garet. An holl ne ouzont ket avat penaos e yae d'he c'haout, a-vihanik, gant ecunded eur bugel, evit goulenn diganti he skoazell en e holl ezommou a gorf hag a ene. Ken bras oa e fiziañ en he madelez ma ne voe morse trec'het gant arvar nag enkrez ebet. Graet en doa pep tra ret, emezañ, p'en doa pedet e Vamm vat ! »

Evit ar re fura eus ar baotred yaouank oa bet savet, er skolaj, Kenvreuriez ar Werc'hez. N'oa ket digor d'an holl, hag evit beza degemeret enni oa ret tremen epad pell amzer eur vuhez a skouer vat.


Pa dizas e bemzek vloaz, Loeiz-Vari a c'houlennas beza kemeret etouez ar genvreudeur : dioustu e kavas dor-zigor, rak a bell-zo oa anavezet evit beza ar c'henta war renk ar zantelez kouls ha war hini ar studi. Pegen eurus e voe o strisaat al liammou e stage ouz e Vamm ! Nag a aked a laka da zerc'hel d'ar gouestl !

Ar pouezusa en e bromesa oa miret **glanded** Rouanez an Elez, hag an dra-ze d'an oad m'emañ ar youlou fall o vervi er galon, e-kreiz touellerez eur gêr vras, e-mesk paotred all leun a fallagriez hag a vreinaurez. Loeiz-Vari, diwallet gant ar Werc'hez, ne ouezas ket zoken petra eo en em zifenn enep ar c'hoantegeziou dirollet, na kaout ar vertuz en argoll, « Kenneheut oc'h anavezet ar pez a c'hell saotri eun ene ma tisklerias din, eun devez, ne ouie ket petra eo. » (Ao. Blain.)


Dleour oa eus ar c'hras-se d'an Itron-Varia, met ive gouzout a rae en em ziwall dibaouez, tec'het zoken diouz skeud ar pec'hed, stourm a-grenn enep an droug bep tro ma veze ret.

E dad en doa eul levr hudur, leun a skeudennou lous, hag a sponte ene divlamm Loeiz-Vari. Hemañ en doa c'hoant bras d'e zistruja, met krena a rae rak kounnar e dad. Eun devez koulskoude m'edo e-unan-penn er gêr, e tapas krog el levr brein, hag e taolas anezañ en tan. « Ar paotr yaouank, a lavar an Ao. Blain, a oa o paouez ober an taol pa gavis anezañ lentik holl hag aonik o c'hortoz distro e dad, ha koulskoude laouen eus ar pez en doa graet. »


Da gendere'hel pajenn 6



An Durzunell



O cha-se-al er c'hoad di-drouz'meus gwelet eun dur-



zu-nell, rous, am eus gwelet eun dur-zu-nell, e



-tre kra-ba-nou eur-spar-fell

I

O chaseal er c'hoad didrous,
'M eus gwelet eun durzunell rous;
Am eus gwelet eun durzunell
Etre krabanou eur sparfell

IV

War va fenestrig, er gwasked,
Am eus kempennet eur gaoued,
Eur gaoued gant touriouigou
Mellezour ha bransigellou.

II

War ar sparfell am eus tennet,
Ha maro-mik ez eo kouezet.
Kouezet ivez an durzunell
Labezet a wad he askell !

V

Sed' va zurzunell er goudor !
Hogen chomet an nor digor ;
Hag an evnig, a-denn askell,
Skarzet, seder, d'ar c'hoad uhel !

III

Gant louzo fener ha gant dour
Am eus gwalc'het an evnig flour :
O tont ganen dre ar parkou
Hi a gane : "Krourougoukou" !

VI

Gwell eo frankiz er baourentez
Eget chadenn ha braventez ;
Gwell eo frankiz ha neiz dister,
Eget chadenn en eur maner !

Evnig Penn-ar-C'hoad

Sant Loeiz-vari a Vontfort

N'eo ket er-maez hepken emañ enebour an ene : en hon diabarz ive emañ e gor, ha ret eo **kastiza ar c'horf** evit e gabestra... Da zeitek ha triwec'h vloaz, Loeiz-Vari a yae dre ruiou Roazon, e zaoulagad warzu an douar, hep sellet nag a-gleiz nag a-zehou, eur bedenn o vleunia warz e vuzellou : evelse ec'h en ziwall e ar c'hrennard diouz ar pec'hed... Hag an hini en devefe gwelet ar chadennou a rae eur c'houriz d'e gorf, ha merkou ar skourjez warnañ, en defe komprenet gwelloc'h c'hoaz pegen chalet oa Loeiz-Vari da zerc'hel ep e-bez an teñzor rouez he doa roet dezañ e «Vamm vat».

Ober a rae adalek neuze ar pez a brezegas diwezatac'h : ma karit ar Werc'hez Vari, baleit war he roudou, kemerit skouer diouz he vertuziou.

Setu echu gant Loeiz-Vari e studioù er skolaj.

Petra ray bremañ ?

Hiroc'h amzer a dremen o pedi... hag eun devez e klev, fraes, mouez ar Werc'hez o lavaret dezañ : «**Beleg eo e vezin**». Hiviziken ec'h anavez youl Doue warnañ : chom a ray feal d'ar galv.


E dad a c'hrosimolo, a gounnaro, pa welo e c'hoantou o vont da get. N'en doa ken c'hoant nemet eus eur mab ofiser pe alvokad, ha setu ma wel anezañ o trei kein d'an enoriou ha d'an arc'hant ken talvoudek d'ar familh, evit beza eur beleg dianavezet, stag ouz eul labour poanier en eur c'hoz-toull bennak ! A nebeudou koulskoude, ar feiz a drec'ho en e spered, ha pa vo deuet ar mare, e roie e aotre a galon vat.

Loeiz-Vari a grog eta en eur studi nevez. E Roazon e chom atao koulskoude, hag en hevelep skol, rak en amzer-ze oa rouez ar c'hloerdiou. Ar skolajou hag ar skoliou-meur eo a gelenne skiañchou ar velegiaj d'an nep a gare, ha pa veze echu o studioù gant ar gloareged, e veze roet dezo an urziou sakr.

Met Loeiz-Vari, galvet da veza misioner, da veza enebour pep falzentez er feiz, a dlle ober studioù pouezusoc'h ha beva en eur lec'h a retred, evit peur-gempenn e ene.

(Da gendrec'hel).

Y. TRANVOUEZ S.M.M.



Itron Varia al Levenez

Gouel ar BLEUN-BRUG

Kastell-Paol, 21-22 Eost 1948

Evel Feiz ha Breiz gwechall, Kroaz Breiz eo kelaouenn ar Bleun-Brug. Setu perak e fell dezi rei da anaout d'an holl renerien ar pez a dremenas e Kastell-Paol, d'an 21 ha d'an 22 a viz eost, evit kenta bodadeg ar Bleun-Brug abaoe ar brezel.

En niverenn-mañ, ne gomzimp peurliesia eus an abadenn nemet dre vras, en niverennou da-zont e welimp a dostoc'h tammou eus al labour a voe graet epad an daou zevaz, dreist-holl evit ar pez a zell ouz ar prezegennoù hag ar menozioù displeget. Evelse e vo anavezet gwelloc'h petra eo ar Bleun-Brug hag e youl evit an amzer da zont.

Kastell-Paol ! Douar benniget Sant Paul Aurelian, pinvidikaet c'hoaz gant enoriou-koz eskopti Bro Leon ; kêr an touriou danteleze, renet gant tour meur ar C'hreiz-kêr, " ar braoa'zo er bed ", evel ma kane Marianig ar Go. E pelec'h gwelloc'h eget eno oa dereat renevezi gouel ar Bleun-Brug goude sioulder ar bloavezioù tremenet ? E Kastell ive eo e voe dalc'het ar Bleun-Brug, teir gwech diouz renk goude ar brezel all ; e 1920, 1921 ha 1922, evel e 1912 ha 1913.

Ar c'houez-hvet tro eo eta da Gastell da rei degemor d'ar gouel kaera lidet bep bloaz gant ar gristenien evit luf Breiz ha sked ar brezoneg : ha kement-se a zo mat, rak Kastell eo kêr-benn ar brezoneg " ledan ", komzet a-dreuz Bro Leon, ha chomet c'hoaz dispak en e holl c'horion.

Na gredomp ket e devefe tro kêr-Gastell da glemm eus an enor graet dezi : mar deo bet pell o tihuna, o rei he asant d'ar gouel, mar deus bet meur a hini marteze oc'h ober penn teñval ouz Breiziz diredet niverus, n'eo ket hi moarvat eo ar brasa kablus : sperejou trenk o doa poaniet da hada an draog, da heja spontailh koz ar " Gwenn ha du ", o klask rei da gredi n'oa ar Bleun-Brug nemet eur bolitikerezh kuzet, savet enep Bro-C'hall... Darn a zo bet gounezet gant ar gevier-ze, hag an degemer graet da genta d'ar Vleun-Brugerien, n'eo ket bet gwall domm : n'eo ket bet fichet kêr evel ma vefe dereat ; n'eus bet nemet ar staliou dalc'het gant Bretoned gwirion hag o devefe diskouezet a-leun o levenez... A-benn ar zul-kreisteiz, koulskoude, gant abadenn ar zadorn d'an noz, hag an heol seder a splannas war Gastell edoug ar gouel, e oa nijet pell an holl goabrennoù ; ha diwar neuze, Kastell a gemeras perz, a galon vat, e laouenedigez an holl.

Hag evit gwir, eun enor eo bet eviti, eun enor bras zoken, aviet gant meur a barrez all... Araok ar zul d'an noz, e oa bet dija meur a guzul ti-kêr eus parrezioù all o kinnig da renerien ar Bleun-Brug o farrezioù evit ar bloaz a zeu ! Ar re-ze a gompren ervat an nerz a zo er Bleun-Brug, e dalvoudegezh evit difenn gwirioù Breiz hag ar brezoneg. Meuleudi dezo !

E gwirionez, eur gouel kaer eo bet hini ar bloaz-mañ. Breiziz o deus respontet da c'halv renerien ar Bleun-Brug, muioc'h eget ma c'helled gortoz evit ar bloaz kenta dreist hol lpa ne oa ket bet graet kals a vrud. Ful levenez eo bet d'an **Ao, Liberal** hag eun digoll eus ar boan n'en doa kot espernet evit aoza ha kompeza pep tra : mar deo aet kerkouls an traoù en dro, n'eo nemet abalamour m'en doa lakaet e amzer hag e holl nerz er zizunioù diweza e servij ar Bleun-Brug, a-unan gant strollad ar renerien : an Ao. Fave, person-dean Lesneven hag aluzenner ar Bleun-Brug ; an Ao. Yann ar Minor ha Jakez Fournier, sekretourien, hag an Ao. Breton, teñzorier. Skoazellet oant bet gant strollad-reneriez Kastell... Holl o deus bet ar gopr evit o foan, ha mat eo an traoù evelse !

Tud a zo deuet eta, ha kals tud ! D'ar zadorn d'an noz, evit ar c'hoariva, ne jome ket kals a gadarioù goulo e sal vras Santez Tereza, ha da zul d'an noz e oa leun-bour. D'ar zul goude kreisteiz, ec'h en em vodas milieroù a dud e park ar Gernevez, war eur c'hlaezezh zudius etouez ar gwez, roet gant madelez an Ao. A C'hebriant evit kaerder ar gouel.

Leoniz oa ar bras eus an dud, evit just. Kerneviz a zo deuet ivez gant o gwis-kamantou kaer, eus Lokornan-Kerne, Rosporden, Douarnenez, Landudec... daoust da c'houel ar " Rouejou glas " e Konkerne ; strollad Plougastel en deus trellet an

daoulagad gant e liou marellet. Kals Bretoned a deuas ive eus Roazon, Paris, hag all, da gannerzi o spered breizad en unvaniez gant o breudeur brezonegerien. Eus tra-mor zoken, e teuas strolladou Iwerzoniz ha Kembreiz (Bro-Zaoz), laouen o kemer perz en hor gouel, hag o tegas evelse an testeni beo eus o c'harantez evit Breiziz ar C'hornog-izel. Ar Vleun-Brugerien n'emaint ket c'hoaz war-nes ankounac'haat an dudi a roas dezo Michael Malone ha Sean Serry, a c'hoarias evito, disul, war o biniou bras, eun dibab eus soniou Iwerzon.

Diou lodenn a zo bet e gouel ar Bleun-Brug : eul lodenn a studi, d'ar zadorn goude lein ha da zul diouz ar mintin; eul lodenn a c'hoariou, d'ar-zadorn goude koan ha da zul goude kreisteiz betek diwezat en noz.

Ar STUDIOU

D'ar zadorn, da deir eur, ec'h en em vode e skol Sant Yann-Vadezour eur strollad Bretoned a bep oad hag a bep stad, c'hoant dezo da studia gwelloc'h labour ar Bleun-Brug en amzer dremenet, hag evit an amzer da-zont.

E niverennou Kroaz Breiz ar miziou a zeu, e roimp an diverra, d'an nebeuta, eus **ar studiadennoù** a voe displeget gant an Ao. a C'hebrant, Liberal, Fave, Seite ha P. Mocaër. Eun 200 den bennak a oa ouz o zelaou : n'eus bet morse kement all er studioù breizad, — testeni sklaer eus youl ar Vretoned en deiz hirio. Hogen ne ve ket mat derc'hel evit an 200-ze hepken an dudi hag an deskadurez a oa dastumet el lodenn-ze eus ar Bleun-Brug!

D'ar zul vintin, e skol Sant Yann adarre, e voe dalc'het ar **c'henstrivadegoù** (pe "konkourioù") : ar re-mañ, evit gwir, n'int ket studioù, met frouez ar studioù graet araok ar gouel.

Eun nebeud paotred yaouank a zavas en eur gador-skol, an eil goude egile, dirak o barnerien, evit kenstrivadeg ar **prezoregezh** : "Petra a c'hell ober eur paotr yaouank, en deiz hirio, evit ar brezoneg, en oberou kristen, er skolioù, er vuhez pem-deziek", setu petra o doa da zisplega. Rouez eo bet amañ ar genstriverien; m'eur a hini all, evit doare, a oa bet en o zoñj kemer perz er gourin : re ziwezad o doa en em gemeret! Dipitus eo, rak pa weler pouez al labour o deus graet Chapalain eus Kastell, Marsel Gouez eus Plabennec, ha Mikael ar Gwenn eus Lanarvily, ne c'heller nemet kaout keuz e vefe bet re verr an abadenn. Iwerzoniz ha Kembreiz, deuet da zelaou ivez, a jomas sebezet o welet pegen ampart eo Breiziz yaouank p'en em lakont ganti a-zevri; ar re holl a zeuas d'ar Gernevez, da zul, o deus gelllet her barn o-unan p'o deus gwelet tan ha galloud Chapalain dirak ar "micro".

Kenstrivadegoù ar vugale a vodas muioc'h a stourmerien hag a stourmezezed, a drugare Doue, evit levenez an dud a zelaouas.

Lenn brezoneg, kana ha displega, bugale Vreiz a oar hen ober pa vez kemeret an distera preder ganto. Re hir e vefe deomp displega ar galloud diskouezet gant pep hini eus ar 68 bugel a strivas. Deuet oant eus Kastell Rosgo, Kleder, Mespaol, Guinevez, Plougoulm, Guélan, pe c'hoaz eus Gouezeg, Lokornan-Kerne, ha zoken eus Perroz-Guireg... Ne c'heller amañ nemet rei meuleudi da vugale Vreiz, d'ar gerent, d'ar vistri ha mestrezed o deus kemeret poan ganto : digollet int bet o welet pegement a blijadur a gemer hor bugaligoù gant al labour-ze, ha pegement e tigor evelse o sperejou. An holl ive o deus gelllet her barn er Gernevez, o selaou darn eus ar re o doa gounezet ar prizioù kenta hag a voe galvet dirak ar "micro" da rei eun tañva saourus eus plijadurioù ar vintinvez : Erwan Konan (13 vloaz) a zisplegas "Bodadeg gant ar Razed", gant kement a arz hag a fines a ma laka da c'hoari gant e vintin, a-uhant gant e vreur bihan Herve (8 vloaz), yaouanka biniaouer a zo e Breiz moarvat! Marivonig ar Go, eus Gouezeg, a gasas ganti ar maout e-keñver ar c'hari, evit he c'hanaouenn "Kaoarintinig ha Marivonig", kanet gant eur vouez flour, lirin ha glan evel dour-sklaer. Annaig-Vari Mingant, eus Lokornan-Kerne, a zibradas ar priz kenta evit displegadenn ar re vihana : N'eo nemet eur boutegid a 7 vloaz, met an teod a zo mat! Tro ha tro e lakeas kement a zouster, a lore'h, a estlamm hag a gounnar da zibuna "Kanaouenn an alc'houeder" ma voe galvet eil tro gant an holl dirak ar "micro", ha teir gwech e vefe bet selaouet gant kement a blijadur hag a c'hoarz.

Pa ne c'hellomp ket displega talvoudegezh an holl vugale all, brudomp da vihana anioù ar re a c'houezas ar prizioù kenta en holl genstrivadegoù :

KENSTRIVADEG AL LENN :

(Eur pennad da lenn, tennet hervez ar c'hoant, eus levr an Ao. Uguen ha Seite : Me a zesk brezoneg.)

Evit ar vugale 8-9 vloaz :

Merc'hed : Jozian Kabioc'h, eus Mespaol.

Paotred : Herve Konan, eus Perroz-Guireg.

Bugale 10-12 vloaz :

Merc'hed : Mari-Paola ar Moal, eus Mespaol.

Paotred : Erwan Konan, eus Perroz-Guireg.

Bugale 13-14 vloaz :

Merc'hed : Marc'harid Philippe, eus Plougoulm.

Paotred : Yann Reungoat, eus Kastell.

KENSTRIVADEG AR C'HAN :

(eur ganaouenn dibabet hervez ar c'hoant).

Merc'hed 9-12 vloaz :

Marivonig ar Go, eus Gouezeg.

Merc'hed 12-16 vloaz :

Marc'harid Philippe, eus Plougoulm.

Paotred :

Paul Corre, eus Rosgo.

KENSTRIVADEG AN DISPLEGA :

Bugale n'o deus ket 10 vloaz : (Kanaouenn an alc'houeder) :

Merc'hed : Annaig-Vari Mingant, eus Lokornan-Kerne.

Paotred : Herve Konan, eus Perroz-Guireg.

Bugale etre 10-12 vloaz : ("An daou vaout") :

Merc'hed : Marivonig ar Go, eus Gouezeg.

Paotred : Herve Kerleroux, eus Kleder.

Bugale 12 vloaz hag ousspenn : ("Bodadeg gant ar Razed") :

Merc'hed : Mari-Jozefa an Du, eus Guinevez.

Paotred : Erwan Konan, eus Perroz-Guireg.



KENSTRIVADEG AR PREZEGEREZ :

Y, Chapalain, eus Kastell (19 vloaz).

Holl o doa poumlet : ar re-man eo a zo bet kurmet. Ne lavarimp ket koulskoude : gwasa a-ze d'ar gollerien, met chans vat dezo a-benn ar bloaz a zeu.

(Ret eo deomp, dre ziouer a blas, gortoz ar miz a zeu evit komz eus ar c'hoariou... Ne vo kollet netra evit gortoz!)

Y. F. AR F.



Kantikou ha kantikerien Breiz-Izel

Kendalc'h ~~~~~ Gant Loeiz Lok

Eur brezoneger eus an dibab, an aotrou Guillaume HENRY, aluzenner e Kemperle, a zontas ober gwelloc'h eget ar kantikerien en e rapk, dre gemeret ar pep gwella eus kantikou Breiz a-bêz, ha lakaat ganto re nevez, en e levr : « *Kanaouennou santel*, dilennet ha reizet evit eskopti Kemper » (1842). Eun taolig kempenn a roas d'ar c'hantikou, hag e c'houennas diouto ar gerioù gallek.

Se ne blijas ket d'an holl ! Eun tamm tabut a zavas. Respont a reas an aotrou Henry d'e damallerien : « C'hoant am eus bet, dreist pep tra, ober plijadur d'an Aotrou Graveran, hon eskob muia-karet, ken douget d'e vro, hag, — her gouzout a ran, — a garfe gwelet e holl valeien o skriva o brezoneg evel ma ra diskibled ar Gonideg. » An doare-skriva a oa bet renevezet gant ar skrivagner-mañ.

An darn vrasa eus kantikou an aotrou Henry a oa tennet eus al levrioù meneget ganeomp uheloc'h (1) ; kempennet oant gantañ avat, ha lod anezo en eun doare dispar. Lakaet e voe ganto ive kantikou nevez-moulet, evel re an aotrou Cabon, person Lambaol-Wimiliau (Canticou evit usach ar Missionou hag ar retrejoù — 1819), re an aotrou Guillaume Rioual, person Scaer (Canticou evit usaj ar retrejoù hag ar missionou, composit gant eur beleg eus a Eskopti Quimper — 1833).

E 1865, e voe kempennet a-nevez e levr gant an Aotrou Henry, hag embannet dindan an ano a « Kantikou Kemper ha Leon, choazet ha renket dre gemenn an aotrou n Eskop René-Nicolas Sergeant — 1865. » Dilezet e voe 22 eus ar C'hanaouennou santel, ha lakaet en o lec'h 58 kantik all ; evelse e voe el levr nevez 188 kantik gant an tonioù.

26 anezo a oa war ano an Tad Manner ; 32 a deue eus an aotrou Bris, 25 eus an aotrou Henry ; Cabon en doa 7 ; G. Le Jeune hag an Tad Martin pep a 6 ; Guillôme 5 ; le Joubioux ha Rioual 4 ; Mikel an Nobletz, Dumoulin, Cabec (eus Bro-Dreger), ha Bozec, pep a dri. (An ao. Bozec, person Sant-Wazeg, en doa savet e 1851, gant skoazell an ao. Cosquer, person an Dreneg, ginnidik a Zant-Wazeg, ar « Guerzioù nevez, gret

gant daou veleg eus a eskopti Kemper »). Cosquer ha Kersale (aluzenner ar Salet e Montroulez) a zo bet kemeret dezo pep a zaou gantig. Unan a oa war anioù an aotroued Guégnen (person Primelin), Y. ar C'hêre, Cario ha Le Lay (an daou-mañ eus Treger), Nourry, Maze hag an Tad Larboulette (eus Gwened o zri), Kerannanac'h, person Montroulez, ha Kernau, person Plougonven.

An anioù-ze a oa holl meneget e penn ar c'hantikou, evel m'eo graet ive en hor C'hantikou en deiz hirio, pa'z eus gouezet da biou o rei.

146 ton a zo e kantikou an Aotrou Henry : 34 anezo a zo tonioù gallek, hep douetañs ebet, ha kement all kerent tost dezo.

★★

Pempzek vloaz diwezatoc'h, e 1880, « Kantikou brezonek Eskopti Kemper ha Leon, renket a nevez dre urz an Aotrou n Eskop Nouvel » a gemeras lec'h re an Aotrou Henry. An Aotrou Yann Guillou, person Penmarc'h, kantiker bras an eskopti, a oa bet pedet d'o c'hempenn. Skoazellet e voe war e labour gant an Aotroued Morvan, Kere ha Pouliquen. O levr en deus bet buhez hir, pa'z eo padet tri-ugent vloaz !

Evel m'en doa graet en e rapk an aotrou Henry, Yann Guillou a kempennas wardro 35 eus ar c'hantikou koz. 86 kantik a voe lakaet en dastumadenn-mañ, hag en o zouez, an drederenn pe wardro a zo bet savet gant Y. Guillou e-unan. An tonioù avat, a voe moulet disparti, e notennoù kan-plaen.

Heñ ivez eo a zavas ar c'hantikou a gaver e « Miz Mari an Eskop dall » (1891), gant an tonioù.

(Da genderc'hel.)

(1) Gwell « Krouz Breiz », miz eost 1948, p. 13.

LEVRIOU

TAD EUJEN : BUHEZ HOR SALVER JEZUZ-KRIST (450 pajenn).

An Tad Eujen hag an Ao. chaloni Uguen o doa savet gwechall eul levr war Buhez Hor Salver Jezuz-Krist : eul levr a-bouez, hag en deus maget, epad hir vloaveziou, kals familhou breizad e buhez o ene.

Aet oa rouez al levr-ze, ha diaes oa bremañ da Vreiziz kaout peadra da studia buhez o Mestr. Koulskoude n'eus nemet Hemañ hag a vefe gantañ ar vuhez wirion, ar sklerijenn, an nerz. — Ha pa vez bet poaniet edoug an deiz war labour ar c'horf, nag eo diskuizus ha talvoudus en em voda en dro d'an daol pe d'an tan, da zelaou komzou ar C'hrist, da studia e oberou hag e vuhez, ha da rei evelse d'an ene ar vagadurez pemdeziek er wirionez.

Eur c'helou plijus hon eus an eurvad da c'hellout rei da Vreiziz : deuet eo pelloc'h er maez eus ar wask al levr nevez a c'hortozed pell 'zo. An Tad Eujen, kabusin, eo en deus e zavet penn-da-benn en dro-mañ.

Daoust m'eo heñvel an dalbenn ouz hini al levr koz, n'eo ket eun advoulerez hepken eo a gaver amañ : danvez al levr a zo nevez eus an eil penn d'egile.

Dindan eur golo livet kaer, e kaver, displeget a-bennadou berr, BUHEZ ar C'hrist ; ha kemmesket gant kelennadureziou Hor Zalver, ar c'HENTELIOU hag ar c'HUZULIOU diveret eus pluenn ar skrivagner. Evelse eo sklaeroc'h an istor dre ma 'z er ganti, ha plijusoc'h da lenn.

Ar pennadou a zo troc'het BERR-AWALC'H evit ma vo aes lenn unan anezo, hep dale ar c'houk : " Pemp munud hepken bemnoz ", evel ma lavar an Tad Eujen er c'hentskrud.

Er penn diweza, ez eus lakaet ive pedennou da lavaret diouz ar mintin edoug an deiz ha diouz an noz.

Al LAVARIOU TALVOUDUSA a zo distaget, e teld al levr, e lizerennou tevoc'h, da rei dezo muioc'h a sked a hag bouez dirak an daoulagad.

SKEUDENNOU niverus a laouena ar pajennou, hag a zikour ar spered d'eh em vaga a-leun gant an danvez.

En eur ger, eul levr eo DA LAKAAT WAR STAL AR BARA e pep tiegezh a Vreiz, ma vo difre e gaout dindan an dorn ; e pep ti e vezo lennet gant frouez bep eil gant Buhez ar Zent.

Kerent hag a zo nec'het o klask gouzout petra da ginnig da briedou yaouank, lezit ar re all da brena dezo ar villn-gafe pe eun dousennloalou, ha kinnig dezo, c'houi, Buhez Hor Salver Jezuz-Krist !

Ar priz, evel just, a zo diouz an deiz-hirio : 500 lur, hag ar mizoukas ouspenn (35 lur).

Goulennit al levr digant :

M. le Directeur d'Ar Vuhez Kriston,
Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère).
C. C. P. 209.81 Nantes.

GUERMEUR : AN OFERENN HEULIET GANT AN DUD FIDEL (15 LUR).

Al levrig-mañ n'eo mui nevez : teir gwech eo bet moulet er bloaveziou tremenet. Fellout a ra deomp koulskoude lavaret eur gerig diwar e benn, pa ne vefe nemet evit rei da anaout ez eus anezañ.

Emeur a-zevri, dre hor parrezioù, o klask an tu da rei d'an oferenn, e-touez an holl beden-nou, ar renk kenta ne dlefe-hi beza morse kollet : evit-se avat, eo ret he anaout gwelloc'h, hag he heulh hervez ar galloud.

Peal d'an doare-kelenn implijet gwechall gant misionerien bras hor bro, an Ao. J. Guernneur, person Sant-Neven, a zispleg e kantikou kelennadurezh an oferenn, e serr-sacha daoulagad an dud fidel etrezek an aoter, edoug ar zakrifiz.

Pevar doare disheñvel da heulia an oferenn a zo displeget e pevar-rumm gantikou :

1. — O sonjal e finvezioù ar zakrifiz.
2. — O sonjal e Pasion hag e maro Jezuz.
3. — Oc'h en em unani gant ar beleg.
4. — Oc'h en em unani gant ar Werc'hez.

An holl gantikou a zo savet en eur brezoneg sklaer, ha war donioù anavezet. Evelse eo aes al levrig da implij en holl barrezioù ; zoken er parrezioù n'o deus nemet eur beleg, e kaver etouez an dud fidel eur vouez vat bennak da gregi gant ar c'hantikou.

E meur a barrez eo implijet a-vremañ, bep sul d'an oferenn vintin, levr an Ao-Guernneur : n'eus ket a dud oc'h en em glemm eus ar boaz, pell ac'hano !

Evit kaout al levr, skriva d'an Ao. J. Guernneur, person Sant-Neven.

Lennit

ALAIN DE CORNOUAILLE : PENHOAD (Spes, Paris 1947, 442 pages).

GWENNAEL (aotrou Cozannet) : KLOTENNOU BREZONNEK. (1948). — (Her goulenn digant M. l'abbé Luguern, directeur de l'Ecole Saint-Joseph, Plabennec (Finistère)).

E gwerz e ti : « Ar Vuhez Kriston », Couvent des Capucins, Roscoff (Finistère)

C. C. 209-81 Nantes

(ar mizou-kas azo ouspenn ar priz merket)

Buhez Hor Salver Jezuz-Krist, gant an Ao. Uguen hag an T. Eujen.....	300 l.
Ar Werc'hez Vari, gant an Tad Medard.....	100 l.
Fatima, gant an Tad Medard.....	100 l.
Sant Fransez a Aziz, gant L. Inizan, kresket gant an T. Eujen.....	200 l.
Bleuniou Sant Fransez (Florett).....	100 l.
Buhez skeudennet Sant Fransez, gant an T. Eujen.....	30 l.
Sant Fransez, mignon ar vugale, gant Breur Melar.....	60 l.
Ar grasou pe ar pedennou dirak ar re varo, gant y ar Go.....	100 l.
Prezegennou war Drede-Urz S. Fransez (2 leor), gant an T. Eujen.....	60 l.
Santez Elizabeth a Hongri, gant an T. Eujen.....	15 l.
An oferenn displeget gant skeudennou, gant an T. Eujen.....	20 l.
Levrig-dorn Trede-Urz S. Fransez, gant an T. Eujen.....	30 l.
Diwar c'hoarzin, gant an T. Medard.....	100 l.

F. VALLÉE ET R. LE ROUX : GRAMMAIRE FRANÇAISE ET GRAMMAIRE BRETONNE.

(20 pages, Editions Prud'homme, Saint-Brieuc).

Al levrig-mañ a vezo talvoudus d'an dud a gar studia ar yezou : kaout a rint ennañ, keñve-riet, an doareoù disheñvel implijet gant ar galleg hag ar brezoneg da zisplega an hevelep menno-ziou. Dre-ze ivez eo merket splann ijin pep hini eus an diou yez-ze.

Kelaouennou degaset da Groat Breiz :

" Le Pays Breton ", revue trimestrielle trilingue. — Abonnement annuel : 250 francs (avec cotisation à Unvaniezh Arvor). C. C. P. Rennes 5852, Jean Choleau.

" Le peuple breton " : politique, économique, social, culturel, international ; mensuel. — N° 10, août 1948. — Directeur : Joseph Martray.

Y.-F. ar F.

E PEB LEC'H
E PEB TI...
E PEB KAMBR

SKEUDENN SANT ERWAN

Gant Xavier de Langlais (Langleiz)

Ar brava skeudenn du ha melen

Priz dre ar post	130 lur war baper fin
gant ar	230 lur war baper kalet
mizou kas	380 lur war baper satinet

Kasit hor goulenn da Groat-Breiz
36 Rue Richard-Lenoir, RENNES

GOUDE AN HEOL TOMM.

Chob ar Follig ha Yann ar Zod a zo bet re domm an heol war o fenn gwechall, hag abaoue int chomet distreset a-zindan o zok : ret eo bet o c'has da veva en ti a vez dalc'het ennañ ar re n'int ket awalc'h. N'int ket drouk koulskoude, setu e vezont laketa da labourat...

Hirio ez eus goulennet diganto kempenn eur gambr.

Eun daolenn a zo da ispiha ouz ar voger gant eun tach. Yann a zello, ha Chob a labouro !

Chob a gemer eta ar miorzol hag ar boentenn : lakaat a ra tal ar boentenn ouz ar voger, hag e sko war ar penn begek, hag e sko...

Evel just, ne stank ket kals ar boentenn er voger !

« He, ledan, eme Yann, emacout o koll da amzer : ne welez ket eo graet ar boentenn-ze evit ar voger a zo en ti all ! Kemer houmañ, sell : houmañ a zo troet he beg etrezek ar voger-mañ ! »

Ezomm a zo ive da liva a-nevez eur c'hornig eus ar voger, en uhel. En taol-mañ eo ret kemer ar skeul : tro Yann da labourat, hini Job da zellet.

Yann, ar pod-liou gwenn en e zorn, a zav skeul... Emañ degouezet en nec'h... Met nec'het eo gant post ar skeul, a gouez el lec'h emañ da liva. Kent-a-ze :

« Chob, emezañ, tenn ar skeul kuit bremañ, n'am eus ket ezomm anezi ken, emacout en em gavet war va labour ! »

« Mat, eme Job, dalc'h mat neuze d'ar pod-liou ! »

Pemp munutenn goudeze, edo Yann hanter vadaouet c'hoaz war an douar, o c'houlenn digant Chob penaos ha perak oa kousez !

E FOAR FOLLGOAD.

Eozenn ar C'haerig, deiz foar Sant Jakez er Follgoad, a zo o klask gwerz da « Vorian », eur gazez tri bloaz.

Stefan Verzer a dosta : eur c'hel goullo a zo en e graou, hag eur bern bilhiji en e c'hodell... « Pegement da gazez ? »

« Dek ha c'houec'h-ugent », eme Eozenn !

« Dek ha c'houec'h-ugent ! Pell emacout diouz da gazez ! »

« Ne welez ket a sklaer ? Sell ouz Morian : klask heñvel outi war al leurenn ! »

Ha Stefan ober, eur wech c'hoaz, tro ar gazez...

« Ya, emezañ, an a-dreñv a zo mat, gwir eo. Met an araok ! Pegen tano ar skoaziou... »

« Tano ar skoaziou ! Tano ar skoaziou ! M'az pijs bet skoaziou evel ar re-ze, e vefes deuet hep roched d'ar foar, kement a lorc'h a vije bet ennout o tiskouez anezo d'an holl ! »



C'HOARZOMP C'HOAZ

DISKOULM KUDENNOU


MIZ EOST

Divinadennoù :

1. Eur pod. — 2. Abalamour ma c'hortozont peziou o daon : peziou danvez evit ar bragou da stanka an toullou, peziou arc'hant evit ar paour. — Ar genstriva deg war ar geriou-kroaz, niv. 1, a zo bet gounezet gant an Ao. F. Prigent, hent Montroulez, Plouyann (P-ar-B).

Geriou-kroaz al Lagad-du, n. 2

	1	2	3	4	5	6	7	8
1	L	E	T	O	N	E	N	N
2	A	B	A	D	A	N	N	
3	B	E	N	E	A	D	T	
4	O	U			L	T	O	
5	U	L	A	D		S	E	U
6	R	E	Z	I	O	U		N
7	E	Z	E	N	K	A	R	
8	R		N	A	E	R	E	D



Divinadennoù :

Da zibuna e miz gwengolo

1. Petra a zo ganet er c'hoad hag a ya da gichen an dour da gana ?
2. Pere eo an dud a garfe beza born ?
3. Petra a ya eus Brest da Gemper dre Gastellin hep sevel eun troad ?
4. E peseurt miz e komz ar merc'hed an nebeuta ?

Geriou-kroaz al Lagad-du, n. 3.

(Kenstrivadeg; gwelit an doareoù e Kroaz-Breiz, n. 3, gouere 1948, p. 15).

A-blaen :

1. Da c'hoari war an delenn.
2. Eur genou bras e douar Vreiz. — Ar peñs kaera a gaver en den.
3. Urz er verb beza.
4. « Unan » saoznek. — Liamma.
5. Pedenn lavaret meur a zvez diouz renk.
6. Diou gensonenn (consonnes). — As-tennet war an douar.
7. Ger briz-vrezoneg; hag a dalv «kompeze». — Eur gensonenn, diou wech.
8. A zegas kof moan. — Ragano-gour (pronom personnel).

	1	2	3	4	5	6	7	8
1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								
8								

A-zerz :

1. Trouz a ra, zoken en dornerez.
2. Pa vez diou, n'eo ket houmañ. — A gil : eur vaz er rod.
3. Aotre a roen. — Toaz dare da vont er forn.
4. Graet eeun gant eul labourer mat. — Ano unan eus Duked Vreiz.
5. Sereijer.
6. Morse.
7. Ger-mell (article). — Eur barrez demdost da Gemper.
8. Eur beleg e karg, pe c'hoaz ar c'hoasa. — Niver.

KELEIER

PLOUVIAN : EUR FAMILH NIVERUS.

D'an 9 a viz gouere 1948, an Ao. Marsel Fave, beleg yaouank war c'hed da vont da visionou an Haiti, en deus badezet e iliz Plouvian Daniella-Maria ar Goff, merc'h da Yann ha da Franseza Jaouen, eus Keroune.

Ar pemzekvet annezad e buhez eo evit ar familh-man : nao baotr ha c'houec'h merc'h.

An aotrou M^r, Fransez-Maria Keramprant, a reas d'ar familh an enor da zougen e-unan ar c'hrouadur war ar maenfont, hag ar vaeronez a voe Jozefina Abily, merc'h-kaer e tiegez Kamhar, ti-gavell ar familh Jaouen.

Pemzek krouadur ! Ma vije bet dre Vro-Chall a-bez ka's familhour evel houman, da labourat ha da zifenn ar vro, hep douetans ebet, e vefe nerzusoc'h ha yac'hoec'h ar vro !

Meuleudi eta d'ar familh-man, vec'hed d'ar vamm ga'onek, ha buhez hir d'ar c'hrouadur nevez badezet. — Enor ive da Blouvian na gil ket dirak lezenn ar vuhez !



Santez Anna ar Palud

Sk. J. Le Doaré

SKOL-VEUR BARZED BREIZ-VIHAN.

Goude eur c'houk a zeiz vloaz, Skol-Veur ar Varzed, savet e 1899, he devoa galvet he izili d'en em voda en Naoned warlene da viz here.

Adroet he doa he fisianz d'e rener koz «Taidir», ha peurleniet ar «poueilgor» gant pevar Guzulier nevez, e lec'h ar re a oa marvet abaoe 1939. — Chom a ra ar Skol-Veur 150 barz-brezonegerien.

Da hanter viz gwengolo, er bloaz-man, e vezo eun eil kendalc'h e Roazon : ne vezo digor nemet d'an izili oberiant.

Daou gannad, dibabet er Skol, a zo bet kaset da Eistez-vod ha da C'horsez Penn-ar-Pont (Bridgent) e Bro-Gembre (2-7 a viz eost 1948).

AR BREZONEG ER SKOL.

Pa zeuas an Ao. Auriol, rener ar Stad, da draogi a-dreuz Breiz, e voe lakaet etre e zaouarn eul lizer a-berz an Ao. Dujardin, eus Lokourian, rener Difemourien ar brezoneg en hor Breiz : goulenn a raed e harp evit kelennadurez hor yez er skolioù.

Neo ket an Ao. Auriol en deus degaset ar respont, met an Ao. Depreux, Ministr an deskadurez, Setu eur pennad eus e lizer :

« ... Je ne méconnaiss pas les raisons qui sont invoquées en faveur de l'institution d'un tel enseignement. Je sais aussi que les sentiments patriotiques du groupement présidé par le Docteur Dujardin ne sauraient être mis en doute.

« Mais le problème posé par son initiative est très délicat. Dans les circonstances actuelles, il m'est impossible de donner aux vœux exprimés une suite favorable. »

Breiziz o devefe karet gouzout pere eo an doueou a vir na vefe kelennet ar brezoneg, a-vreman, rak pell'zo e klevont ar ganaouenn-ze !

Dreist hoil pegwir ec'h anzav an Ao. Depreux ez eus abegou mat da rei ar gelenadurez-se ! Souezet omp zoken e ve awalch eus skrabadenn eur Ministr evit lezet a-gostez ar gwirioù en deus ar brezoneg da veza kelennet d'e dud, evel an hoil vezou all !

**Diwallit ho chatal
Klozit ho parkeier**
gant **KLOSSEL**
SOC'LA CLÔTURE ÉLECTRIQUE
30 rue Saint-Augustin - Paris (2^e)

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h mab

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03

Levriou-skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar burevioù

Levriou-oferenn

Levriou-kan

Levraoueg

Imprimerie Centrale de Bretagne

Société à responsabilité limitée au Capital de 3.000.000 de francs

EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir — RENNES

Téléph. 39-10 /

La nouvelle HISTOIRE DE BRETAGNE

de M^r l'abbé POISSON

Illustrations de X. de LANGLAIS

est parue...

Dans ce livre simple, mais étoffé, tous les publics bretons puiseront leur nourriture : les uns, déjà versés dans l'Histoire de Bretagne retrouveront les grandes lignes de notre passé glorieux, les autres, y liront avec bonheur des récits choisis, véritables morceaux d'épopée qui donnent à notre peuple une physionomie si curieuse et dont le souvenir enchante l'imagination.

Abbé F. MÉVELLEC.

LIVRE de 400 pages in-8 raisin

11 illustrations de X. de LANGLAIS

Broché : Prix de vente : 420 frs + 30 frs de port

Relié : dos toile : 700 frs + port

dos basane : 800 frs + port

dos chagrin avec motifs celtiques, numérotés de 50 à 100 : 1500 frs + port

OUVRAGES EN BRETON

Yannig, par LE DIUZET	60 frs
Sinbad ar Martolod	75 frs
Ar Pesk Aour, par PAOL FEVAL	75 frs
Marc'heger ar gergoad	35 frs
Niveri ha Konta e brezoneg hag Diazevou Istor Breiz	30 frs
Lanber	40 frs




Tous ces livres sont en voie d'épuisement rapide, ainsi que le dictionnaire Français-Breton de F. Vallée dont il ne reste plus que quelques exemplaires au prix de :

Edition ordinaire 450 frs

— luxe..... 700 frs


Adresser vos commandes à la Revue

Teir
feunteun
kaër
e Breiz-Izel



Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Mouleriez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES



AR WEZENN-DERO

<i>Va zad-koz en doa dastumet eur vezenn :</i>	<i>Tregont vloaz 'zo abaoue...</i>
<i>Kouezet oa eus eun dervenn.</i>	<i>Va zad-koz 'zo ét d'ar baradoz,</i>
<i>El hioz he djiare,</i>	<i>Da ziskuiza :</i>
<i>Eun nebeud goude e tiwane.</i>	<i>An dervenn 'zo kresket abaoue,</i>
<i>Da genta, eur gorzennig,</i>	<i>Deiz ha noz,</i>
<i>Ha prestik, diou, teir zeliennig :</i>	<i>Hep ehana.</i>
<i>A-benn eur pennad e plege gant an avel.</i>	<i>Bras eo deuet, ha kreñv :</i>
<i>Da vloaz : eun troutad-uhel.</i>	<i>Hag evit gwelet he beg</i>
<i>Ha daou pe dri skour</i>	<i>Bo ret sellet war-du an neñv.</i>
<i>Gant eur c'hroc'hen flour.</i>	<i>Pa glev mouez c'hroz an amzer, e pleg...</i>
<i>Da zeroù ar goañv e kouezas an deliou</i>	<i>En he bleñchou frank digor</i>
<i>Evel daelou :</i>	<i>An ezenn sioul a gan...</i>
<i>Va zad-koz o lakeas en douar</i>	<i>D'al laboused e ro goudor,</i>
<i>D'ober tremp,</i>	<i>Ha disheol d'an dud en hañv...</i>
<i>Rak an dervenn a oa c'hoaz sempl</i>	<i>Bremaik d'an diskar-amzer e tispluo,</i>
<i>Da c'hortoz an amzer glouar.</i>	<i>Hag etrezek an oabl e savo</i>
<i>Met pa deuas an nevez amzer</i>	<i>He c'hef skarnilet,</i>
<i>E savas ar seo er brankou tener :</i>	<i>Amañ hag ahont kinviet...</i>
<i>E pep tu e fuc'he ar vuhez,</i>	<i>Hag er bloaz a zeu e kendalc'ho,</i>
<i>Hag e dervenn va zad-koz ivez.</i>	<i>Rak an dervenn morse ne nac'ho</i>
	<i>Ar vuhez roet dezi</i>
	<i>Gant Doue 'vit e veuli.</i>

Yann GORRIGAN.